

KANTIK NEVE
ZANT ERVOAN

DISKAN

*Nen euz ket en Breiz, nen euz ket unan,
Nen euz ket eur sant evel sant Ervoan. (bis)*

I

N'euz ket en Argoad na mu en Arvor,
Kouls ha sant Ervoan 'vit an dud a vor.
N'euz ket 'barz ar vro, dre-oll e lerer,
Hag e ve ken mad 'vit al labourer.
N'euz ket kaeroc'h skouer d'an dud a lezen,
Evid sant Ervoan, skouer ar veleien.
Ha d'ar bevien gez ha d'an dud a boan,
Nen euz ket gwelloc'h evit sant Ervoan.

*Nen euz ket en Breiz, nen euz ket unan,
Nen euz ket eur sant evel sant Ervoan. (bis)*

II

N'euz chapel ebed en bro Breiz-Izel,
Evid-on ker koant ha m'e e chapel.
Mar fell d'ac'h pedi ha pedi ervad,
Et d'ar Minihi da glask ho mennad.
Dousan m'e gwelet ar maner zantel,
E-lec'h m'e ganet sant braz Breiz Izel !
Maner Kervarzin a welaz ive
Ine sant Ervoan o ninjal d'an Ee.

*N'euz Chapel na ti em bro Breiz-Izel
'Vel ti sant Ervoan ha 'vel e chapel.*

III

Nen euz ket en Breiz eun iliz ken kaer
Hag e iliz-veur en ker Landreger.


Evit sant Tual, ho Tad binniget,
Otro sant Ervoan, c'houi 'n euz hi zavet.

Enon man ho *pe* ha n'euz ket er vro,
En efe gwelet mu a viraklo.

Me deuy war-n-ean euz a Gervarzin,
Hag e ve red d'in dont war ma daoulin.

Dister oa ho *Pe*, re dister, allaz !
Adzavet eo bet kaeroc'h 'vit biskoaz.

*Nen euz ket en Breiz evel sant Ervoan,
Ken kaer hag e Ve na zo ket unan.*



An otro sant Ervoan a zo bet douaret en iliz-veur Landreger, drek ar gador zarmon. Gwech all en evoa enon eur be kaer. Hirie eo bet adzavet euz ar c'haeran gant an Otro Bousné, hanvet da viken *Eskop Zant Ervoan*. ha ker karet gant ar Vretoned. Enor d'ean war an douar ha joaio er bed-all !

Eur beden evit-an, pelerined vad, pa daoulinet war ve an Otro Zant Ervoan.

Neb a gan ar c'hantik-man gant doujanz Doue, a c'honeo daou-uzent devez induljanse.

Landreger, an driouac'hed a viz Mae 1883.

† EUGÈNE ANGE MARIE,

Eskop Sant-Brieg ha Landreger.

